



SKOL-LOJAÑ TI AR BRUG : BEZ 'MAOMP GANTI !

D'ar yaou 23 a viz mae 2024 : un deiziad a-bouez bras evit Skolaj Diwan kemper.

Abaoe re hir amzer ha goude meur a zilojadeg, e oa skolaj Diwan Jakez Riou war glask ur skol-lojañ tost d'ar skolaj, ul lec'h dereat evit degemer ar skolajidi. Re hir e vefe din kontañ deoc'h ar rak hag ar perak eus an afer, hogen, goude ur viken hag emvodoù diniver, hag en em guzuliañ, deuet eo an tamm ganeomp !



Un tennad kentañ a-bouez bras a zo bet dirouestlet, d'ar yaou 23 a viz mae 2024: sinet ez eus bet ganeomp un akta evit perc'hennañ sevenadur kozh an ti-retred Ar Brug , gwelloc'h anavezet dindan anv « Ti ar Brug » !

Fellout a ra din trugarekaat a-greiz kalon ar skipailhoù evit al labour kaset war-raok a-ziagent, rak hepto e vije bet startoc'h disoc'hiñ, bennozh dezho holl !

Hogen, n'eo nemet ar bazenn gentañ.

Hiziv, ar gevredigezh nevez Kroashent Kerne, a zo eta perc'hennet war ar savadur e-keñver e verañ, niverus eo ar raktresoù war ar stern, kentañ hini anezho o vezañ : lojañ skolaj Diwan Kemper (unan eus diazezerien Kroashent Kerne) en e anv eo e skrivan deoc'h. A-bep-seurt traoù a zo bet klevet a-sell ouzh ar raktres gant prantadoù 'leizh a entan, lod all gant skuizhvezh, fallgalon ha goulennata. Ha dont a raimp a-benn ? A-benn pevare an diloadeg ?

Ha kavet e vo gant ar skolajidi bod er skol-lojañ nevez ? Ya, a c'hellan respont deoc'h.

Pevare ? Se zo hervezomp. Bremañ emañ ar vestroni ganeomp. Ret eo d'an holl kompren pe-gen bras eo an daeadenn. Araok degemer skolajidi er savadur nevez, ez eus un toullad labourioù da seveniñ . Labourioù a roio tro da bep hini ober e lod. An deiziad digeriñ a vo stag ouzh kas war-raok al labourioù-se. Ur poent all na c'heller tremen hebiou dezhañ ; tremen dirak ar bodad-surentez, ar c'huzul-merañ a bleto gant ar poent-se. Hiziv-an-deiz e c'hellomp krediñ digeriñ ar skol-lojañ d'an distro-skol kentañ, e miz Gwengolo. Komprenet mat eo bet ganeoc'h, kement-se a vo diouzh hon nerzh-labour, kerkent hag hiziv. Bremañ diouzhtu !

Ezhomm a zo eus an holl.

Galv a vez graet d'ho parregezhioù, d'hoc'h amzer vak ! Sellout a ra eus an holl, kozh, a-vremañ, kerent da-zont skolajidi (diavaezidi, hanter diabarzhat, diabarzhidi), ar bodad pedagogel, a-duidi, mignoned, kement hini c'hoant gantañ kemer perzh er raktres entanus-se. A-bep-seurt traoù a vo da ober diouzh barregezh ha youl pep hini : naetaat (leur, gwer), kaeraat (paper-moger, livañ),

tredanerezh, bitrakerezh. Pep hini a gavo e lod !

Meur a brantad a zo bet lakaet en linenn, pep hini anezho liammet gantur c'henurzhier a hento ac'hanoc'h war al labour a zo d'ober.

Enskrivadurioù evit al labour a-youl vat, amañ:

<https://lite.framacalc.org/8r9qizybv-a7l1>

Ma fell deoc'h e vefe kinniget prantadoù all, grit ar goulenn dre kehenterezh ar skolaj. Mil a-bouez eo, arabat c'hwitañ war an taol ! Ha dreist-holl, arabat lâret « graet e vo hepdon », n'eo ket gwir ! Raktres an holl eo. Ouzhpenn-se, an devezh skouer a zo plijus kenañ, aergelc'h dreist, labour evel-just, ehanoù evit predañ en-dro d'ur regezer da skouer...

Ur raktres-bodañ eo da gentañ.

A-viskoazh eo bet lusket buhez ar skolaj gant engouestl pep hini, mont en-dro ar skol-lojañ o tegas kempouezh-arc'hant, met dreist-holl nested dre ar soubidigezh.

Ma fell deomp e vefe didrubuilh amzer-da-zont ar skolaj, e vo ret kaout brud vat war ar skol-lojañ hag un degemer didamall evit hor bugale. Kement-se a zo a-hed dorn. Tost omp ouzh un disoc'h hirc'hortozet gant an holl. Deomp de'hi. Krediñ a ran start ne chomoc'h ket diseblant. Anzavit emañ ar gwir ganin !

Dor-zigor a vo evit un tamm gouel d'ar gwener 14 a viz mezheven da 6e noz e « Ti ar Brug », araok gouel ar skolaj.

Ken ar c'hentañ e salioù Ti ar Brug.

A galon.

Thierry Goudédranche, prezidant kuzul-merañ skolaj Diwan Jakez Riou, Kemper

